

Extrait de La Croix
des Côtes-du-Nord
— 1896 —

5

(2)

DEK GOURC'HEMENN ar gwir-Vreizad

War don : *Eun Doue hep ken adori.*

Da Vro en peb lec'h a veuli
Ha dreist peb bro holl a gari.

He hano gant fae na lari,
Na netra euz pezh 'zo enni.

Gant da holl c'halloud skoazelli
Ar re a labour evit i.

Ar brezoneg a difeni,
Ha kalz 'zo oc'h hen argadi.

Er iez brezoneg e komzi
Hag en brezonek e skrivi

'N eun hevelep enor 'laki
Bro-Vreiz, Iverzon, Bro-Gemri.

Da feiz, da gredenn a viri,
Evit Doue ma servichi.

Ar padonniou darempredi,
Sent koz Breiz-Izel a bedi !

Ar protestant a bellaï,
Ouz ar fran-masoun e stourmi.

Stourm ive ouz ar vewenti ;
Gant kement-se, da Vro 'zavi.

JAFFRENOU.

(17 ans)

Ah ! petra laràn-me ? Caet moderation
A so eun dra boanius, pa dezir ar galon ;
Mes couscoude eo goel combati ar panchant,
Eguet ne de bewa evel un insolant.

Sourcen an ol viçou dre ol a meus clasquet,
Hac ebars er boesson emeus-y rancontret ;
Me a deu de guervel mam ar fallagriez,
A laca an dizurs en kêr ha var ar mêz.